

KANTIK SPIRITUEL


VAR

AR VUEZ BURZUDUZ

EUZ AN

AOTROU VIANNEY

BELEK



Mari, rouanez ar zent, patrounez Breiz-Izel,
Ho pedi ran d'am zikour ha da rai din skoazel
Evit galloud skriva mad ar vuez burzuduz.
Euz ann aotrou Vianney, belek karantezuz.

Eur servicher oa d'ehoc'h, c'houi er goar, ô Mari;
He blijadur oa lakat ann holl d'hoc'h enori;
Enn hoc'h-hu, var lerc'h Jesus, lake he holl fianz,
C'houi a zigase dezhan grasou en abundans.

Groët en deuz var ann douar kement a vurzudou,
Ha kaset dar barados kement a eneou,
Ma c'hallo zur he vuez beza dre ar bed holl
Vit gloar an Aotrou Doue anavet gant ann holl.

D'ann eiz devez a viz maë, miz kaëran euz ar bloa,
Miz choazet vit enori ann Itron Varia,
Voë ganet ann den santel e parrez Dardilly
Hag a voë roet dezhan ann hano Jean-Mari.

He dad hag he vamm a oa tud a zoujans Doue,
Tud hag a ouie kelen ervad ho bugale.
Rag holl ho devez bevet déol var ann douar;
Ober a raint da viken ho enor hag ho gloar.

Petra bennag ne oant ken nemet labourerien,
Karantezuz braz a oant euz ann holl baourien.
Kement paour a dremene dre barrez Dardilly
A gave digemer mad hed ann noz enn ho zi.

Pedenou ar baourien hag ho holl benouziou
A denas var ann ti-ze euz ann êe kalz grasou.
Evit ann digemer mad a rent d'ar baourien guez
Doue rôe d'ho bugale ar speret ha furnez.

Jean-Mari dreist ar real oa eur c'hrouadurik
Zentus ous he dad, he vamm ha fur giz eunn elik.
He vamm alies gant joa a lare n'he c'halon
He vije eur c'hrouadur a venedicsion.

N'hèn devoa nemet pemb bloaz pa ie alies mad
Da ziarben ar baourien o tont da di he dad.
Beza en devoa outo kement a garantez
Ma skuille daêlou dourek e uel't ho faourentez.

Da zeiz vloaz hoa deut he dro evel he vreudeur-al
Da vont bemdeiz var ar maez da zioual he c'hatal.
Mont a re a galon vad, mez imaj ar Verc'hes
A gase bepret ganthan : hi oa he batrounez.

Zablanti ran er guelet gant he vin grasiuz
E tonet gant he loéned d'eur stanken dudiuz,
A zo hanvet *Kân-ar-Voualc'h*, rag mouilchi holl en
A vez eno o kana ho zoniou da beil tro. [dro

D'ann draounienik gaër-ze kase peurlieza
Epad ann nevez amzer he loéned da voueta.
Dre he speret dous a mad, he zrem bepret laouen
Hoa karet en guirionez gant an holl vugulien.

C'houi zo bepret, va Doue, Doue ar batriarched :
Pa garet, c'houi ra zent braz a vugulien loéned.
Skuilla rit gant abondans ho penedicsion
Var ann dud paour a speret hag izel a galon.

D'ar c'hrouadurik-man ive c'houi rôe kalz grasou,
C'houi rente kaër he ene gant peb seurt vertuziou.

Soursi ho poa a nezhan vel euz eur bouket liz
A dleie beza eunn deis ar gloar euz hoc'h Iliz.

A neuze tiarbene he garg kaër a velek
N'eur ober eunn aoterik etal eur voeen hallek ;
Lakat a re var nezhi gant kalz déoliez
Imach a Verc'hes Vari, rouanez ann elez.

Hèn hag he gamaradet d'ann Itron Varia
A lare var ho daoulin eunn *Ave Maria*,
Hag e vije he galon karguet a levenes
Enn eur oelet peb unan o pedi ar Verc'hes.

Amzer he vugalerez evelze dremenas
Enn eur servicha Doue gant eur garante vras.
Euruz êo ann dud iaouank, euruz ar vugale
Ho deuz abret ann heur vad da servicha Doue !

[len
Eunn devez digant he vamm ar c'hrouadur a c'hou-
Perag n'er c'hase ket mui d'ar zul d'ann offeren ?
He vamm a daol var nezhan eur zel a garante
Hag ho zellet euz ann êe he daëlou a rede.

[pren.
He dourn a zoug d'he c'halon d'ober d'ezhan kom-
Ne oa mui n'met he galon iliz da bep kristen.
Ar *Revolution* vraz gant he falagriez
A lake dre holl hor brô spount a tristidigez.

Gant eur belek kalounek kuzet taostik d'he gher
E reas he bask kenta pa oa deut ann amzer.
Ha Doue n'he ene glân a skuillas he c'hrasou,
Ma ie bemdez muioc'h-mui var gresk er vertuziou.

A neuze ie gant he vreur d'ar park da labourad :
Ober a re he zever bepret a galon vad.
Alies var-zu ann êe he speret a zave
Evit kinnig da Zoue ar bouan a c'houzanve.

Enn doundet euz he galon hen doa klevet liez
Mouez Doue ouc'h he c'hervel vit ar velegiez.
Kentiz ma oa deut ar peoc'h, ias d'ober he studi
Gant ann aotrou dom Balley, person e Ecully.

Ne oa ket zur evit choaz eur skoulier guelloc'h,
Keneubeut kaout en neb leac'h eur belek santeloc'h.
A hep seurt madôberiou oa karguet he vuhe :
Eur belek oa en eur ghir hervez kalon Doue.

Digouezout reas ganthan epad he skoulajou
E leiz a bouaniou speret ha kalz a drubuliuou.
Mes Doue er c'henerzas ken en doa echuet;
Da nao vlavez varnuguent he oa bet beleguet.

Aotrou person Ecully er goulenez neuze
Digant ann aotrou n'eskob vit beza he gure.
Epad ma re skol dezhan hen devoa aliez
Guelet he vije eunn deiz eur skouer a zantelez.

Erruet e Ecully en labour hep repos
Da gas bemdez eneoù en hent ar baradoz,
Hag euruz en em gave da gommans labourad
Gant eur person ken santel, gant eur pastor ken
[mad.]

Abarz nemeur e varvas an aotrou dom Balley,
Mes kent mervel e rôaz d'ann aotrou Vianney
Ar gouriz-reün a zougue hag ann traou al ouc'h pen
Ho doa servichet dezhan da ober pinijen.

Goudeze hen a rôas euz a greiz he galon
Var ann aotrou Vianney he venedicsion.
Kenavo er baradoz dezhan a lavaras,
Hag evel ma varv ar zent kentiz hen a varvas.

Holl dud parrez Ecully a c'houlennas neuze
M'ho divije da berson ann aotrou Vianney.
Mes ne oa ket rôet dezho, kaset oa da berson
Da eur barrez hanvet Ars, e kinchen ker Lyon.

Dilec'hi reas kentiz evit mont d'he barrez ;
Enn hi hen deuz tremenet ar rest euz he vuez
O c'hober bemdez-c'houlou brezel da Lucifer
Hag o kas d'ar baradoz eneoù hep niver.

Goulen réas ous Doue n'he brezans daoulined
Ar c'hras da blenia mad he barrezianed.

N'eur erruet n'ho souezk euz a greiz he galon
Hèn devoa rôet dezho holl he venedicsion.

Ann dansou, ann ebatou a rene er barrez,
Labour zul, mesventiou, diguempennadurez.
Mantret a oa he galon, skuilla a re daëlou,
Deis ha noz pede Doue da douch ho c'halonou.

« C'houi danserien, e mezhan, ha c'houi danserezed,
» Lezel a rit ho el mad vit heul ann drouc spered ;
» Monet a rit gant ann diaoul d'en em zivertissa,
» Hag ho c'hel mad a lezit a goste da ouëla.

» O c'houi pere, e mezhan, a labour d'ar zuliou,
» Ne c'honéed zur netra n'meit koll hoc'h eneou.
» Arre oeler o charrad zul ha gouel hep espern
» A charr ho eneou paour da islounk ann ifern.

» Pa oelit unan bennag meô dal o tont d'er ger,
» Ha gout a rit eô henes eur boureô d'hor Zalver ?
» Donnet a ra koulscoude euz a vénez Kalvar :
» Lakaït en deus d'ar maro Roue an êe hag ann
[douar.

» He ene paour da Satan en deuz ivez guerzed ;
» Gant eur vandenad diaoulou eô d'ar ger digased.
» Mar deû, siouas ! da vervel hep ober pinijen,
» He lec'h vezo en ifern da liski da viken. »

Zantelez vraz he vuez hag he brezegennou
A zeuas dre c'hras Doue da douch ho c'halonou.
Dilezel a rezont krenn hent ar gollidigez
Evit labourad da vad en ho zilvidigez.

Hèn en em lakeas neuze da guempenn he iliz,
Ma vije kaëroc'h kinnig enhi ar sakrefiz.
Da zant Yan ar Badesour en devoa groit ivez
Ha da zantes Philomen eun ilizik nevez.

Tostik ivez d'he iliz eunn ti en doa aozed
Evit rai digemer mad d'ann emzivadezed.
Triuguent, lies ouc'h pen, euz ar guez bugale
A vague bemdez enhân dre brovidans Doue.

Eunn deis tigouezas en ti dienez a bep tra,
Ne oa nag arc'hant, nag eed, na bleùd d'ober bara.
Mantret a oa he galon gant ann dristigez
O oelet d'he vugale kement a zienez.

Da blac'h he di lavare en he dristidigez :
« Petra rimp'ta, e mezhan, euz ar vugale gez? »
Enn arvar, en esperans hèn bignas d'he zolier :
O Doue, pebeuz burzud ! leun eô a ouiniz kaër.

N'eur skuilla daëlou a joa ha n'eur veuli Doue
Kentis hèn a zizkenas da gaout he vugale,
Evit lavaret dezho ann ober burzuduz
Groet evit ho gant Doue, ho zad karantezuz.

Diou vechall en devoa groit ar burzudou kaëra
Enn eur lakat da greski ar bleùd d'ober bara.
Hag ar bouëd tre he zaouarn eunn deiz all a greiske
Epad ma re tro ann daol o rei d'he vugale.

Mes lezomp evit bremà, lezomp he vurzudou
Evit komz euz he vuez, euz he binijenou.
Holl ar zent a zo enn êe gant Doue enn he c'hloar
Ho deuz bet groet pinijen pa oant var ann douar.

Rôet enn devoa d'ann dud paour he holl zillad guele,
Hag hèn bemnoz var ar plous hag ar plenc'h a
[gouske.

Ober a re c'hoaz ouc'h pen bep seurt pinijenou
Kenn rust evel eunn ermit a vev enn dezerzou.

He vevans pemdeiziek a oa peurlieza
Dour hag avalou douar gant eunn tamig bara.
He vara guiniz rôe bemdeiz d'ar baourien
Evit ho bara zeret divar ann aluzen.

Ann den eurus Vianney en devoa tremened
Huec'h vloaz o keleni mad he barrezianed,
Pa zas ann diaoul (m'hen argaz) da enebi outhan,
Ha da ober deis ha noz eur brezel rust dezhan.

Lavaret a re dezhan evel da zant Francez :
« Ta hano n'eô ket skrivet var al leôr a vuez :

» Evit ta oberiou mad, evit ta binijen,
» Ta lec'h a zo en ifern da liski da viken. »

Ann den zantel a lakas he fizians e Jesus
Pehini n'euz hor prenet dre he oad presiuz,
Ha Satan en em denaz da fond ann islounkou
Da c'houl ali Lucifer, kabiten ann diaoulou.

Ar person en em brepar d'ar brezel a zevri
N'eur bedi Doue bemdez hag ar Verc'hes Vari.
Pedet en deuz d'he sekour ar zent ag he el mad :
Lezit bremâ Satânas da zonet d'ar gombat.

Da greiz noz e teu Satan d'ober he gam-droiu,
N'em blijout a ra meurbet e kreiz ann amc'houlou :
Dre ar pec'het en devez kollet he sklerijen,
Hag ez êo deut da veza prins ann devalijen.

Da lavaret d'ar person oa erru d'he oelet,
Ha da zihûn anezhan mar vije bet kousket,
Tri saol re var ann or borz ha gant kement a herr
Ma krene ti ar person gant he daouliou pouner.

Da guenta ann den santel a ze er mes a ben
Evit goût piou a zeue dann heur-ze d'he c'houlou.
Mes evel ne gave den tistroe da gousket
N'eur bedi Doue da zont d'er gouarn gant he elet.

Satan hep digori dor a ie ebars ar porz,
Hag eno en em lake neuze da huchal forz,
Ha da laret d'ar person bep seurt sotoniou
Pere ne gaver skrivet meit e leôr ann diaoulou.

P'hên devoa huchet er porz evel eur speret foll,
Hên ie da gamb ar person evit c'hoari he roll.
Eunn trous, eur safar a re enhi epad ann noz
Da viret ous ar person da gemer he repoz.

Eunn daolen oa en he gamb da Vari hon Itron,
Eur skeûden oa a vister ann Inkarnasion.
Dirag ann daolen gôz-ze d'ann noz ha da vintin
Ann den santel a bede Doue var he zaoulin.

Enn daolen-ze ma peintet ar guir humilite,
Enhi e ma peintet c'hoaz vertu ar burete.
Dre ar gasoni en deuz euz ar Verc'hes Vari,
Satan a zaotre bemnoz ann daolen-ze gant pri.

[ouc'h pen,
Er bloaz a c'hras triuec'h kant huec'h voarugent
Aotrou person Sant-Trivier a zeuas d'he c'houlen
Da zont gant he genvreudeur a ze dre garante
Da brezeg da Drivieriz retret ar jubile.

Ann den santel Vianney ne ouie ket refus
Rai zikour d'ann eneou prenet dre oad Jesus.
Mont a ras a galon vad da barrez Sant-Trivier
Da brezeg ar jubile evit gloar hor Zalver.

Mes ann diaoul holl kounaret e oelet kement-ze
Da heul ann aotrou person a ias d'ar jubile
Evit enebi outhan evel peurlieza,
Ha miret ous Trivieriz d'en em gonvertisa.

He genvreudeur beleien ho devoa bet klevet
Komz euz an aotrou person hag euz he zroug spe-
A c'houlernas vit ober eunn tamig goab outhan [ret,
Ha deut a oa he ziaoul koz d'ar jubile ganthan.

Ar re yaouank, paotret gê, ho divije karet
Gout ive pe seurt lapous a oa ann droug speret.
Eunn noz a oa goude koan ne rent nemeit goapal
Var goust ann aotrou person gant diaoul he bres-
[pital.

Pa oant skuis va aotrounez, erru avans ann noz,
Peb ini en em denas d'he gamb evit renoz.
Ha Satan d'ôber en ti bar-avel ha tourmant
Ma krene ar mogeriou beteg ar fondamant.

Ann aotrounez gant ann aoun a zilamas er mez,
A ias da gamb ar person da c'houlen trugarez.
Hèn a lavaraz dezho : « Chomit n'ho koueliou,
» Ha lest Satan, e mezhan, da ôber he ardou. »

Goude jubile Trivier, ias ann aotrou person
D'eur barrez hanvet Montmerl da rai ar mission.

D'eno he enebour koz hen heulias ive,
Hag er charre tro ar gamb bemnoz en he uele.

Chetu darn euz eunn disput en devoa eunn devez
Gant Satan he enebour, en he iliz parrez.
Satan en injurie, a damale dezhan
Ann niver a eneou a dene diganthan.

« Te so avarisiuz, e me ann droug spered,
» Ann avarisiusan e meuz biskoaz gueled.
» Mar ve holl te genvreudeur evel dit ta hunan,
» Ne meze ket eunn ene euz ann eskopti-man.

» — Me bout avarisiuz? gaou a laret Satan : [nan.
» Ne meuz nag aour nag arc'hant evit doun va hu-
» Ne glaskan ket er bed-ma ar madou berr baduz,
» Ha te gret c'hoaz lavaret oun avarisiuz.

» — Neô ket ze a lavarane, e me ann ærouant :
» Ne gomzan ket dit brema a aour nag a arc'hant,
» Mes komz a ran, te er goar, euz ann holl eneou
» Pere a denes bemdez er mez euz va lasou.

» Pevar ugent mil ene heus te deja tennet
» A oa ebars ma roëjou... ha te gret c'hoaz laret
» N'out ket avarisiuz. Mes gortos, ni ouio,
» Kent ma zafez euz ar bed, te pe me c'hounio.

» Perak e res-te koves ar pec'hejou ker piz ?
» Perak prezegi bemdez hag ober katekiz ?
» Lezit pelloc'h peb unan da veva enn he roll,
» Goazaze da biou bennag a zeuio d'en em goll.

» Lies me ra examin ar re a goveses,
» Esad a ran ho derc'hel bepret n'ho dallentes.
» Te ho examin d'as tro, mes kaër e c'heus ober,
» C'hoaz e meuz unan bennag merket var ma
[c'haier. »

Satan, evel mer guelit, ne glask netra guelloc'h
Evit lakat holl ann dud de vont fall pe falloc'h.
Mont a bec'het e pec'het epad ar vuez-man
Maz aint goude ho maro holl d'ann ifern ganthan.

Goude beza tremenet pomb ha tregont blavez
O tont evelse da Ars d'ober he siaoulerez,
Kent mont d'he drô evit mad, ô maliz a Satan !
E guele 'n aotrou person hèn a lakaz ann tan.

Plous a koadach he oële a zevas penn da benn,
Hag he holl imajou zent n'meit zantez Philomen :
Goude, hep kregi enn ti, ann tan en em vougas,
Ar pez a lake soueset ann dud bihan ha bras.

Ann dud tromplet gant ann diaoul en em lakas ive
Pell amzer da zikrial ann aotrou Vianney.
Peb unan hèn disprize hag a re goab outhan,
Ne oa mui n'meit he eskob a gare aneshan.

Doue a savas er fin, hag a reas guelet skler
Ar vertu hag ar melit eus he ouir servicher.
Seulvui ma oa diagent goapet ha disprizet,
Seulvui he oa goude ze karet hag enoret.

Ar brud eus he santeles ias neuse tro var dro,
Ma teue tud d'he uelet bemdez eus a bep bro ;
Darn ous a bep seurt drougou da glask paredigez,
Darn all evit ann affer eus ho zilvidigez.

Ars a zeuaz da veza eur barrez ken bruded,
Kement a dud ie dezhi a bep korn euz ar bed
Ma oa ret mad da Arziz, evit ho digemer,
Ledanat ho c'hoz hentchou a kreski ho sier.

Ann den santel ne gouske nemeit diou heur bemnoz,
Rag peurvuia he save d'eunn heur goude kreiz noz.
Ober a re he beden gant kals deoliez,
Ha neuse ie d'en ilis d'he gador da govez.

Beteg seis heur e chome 'n he gador binijen,
D'ann heur-ze var ar pemdez lare he oferen.
Gant tan karantez Doue vije ken entanet
Evel pa vije eunn el ouz ann êe diskennet.

Tre prezegi, kovessat hag ober katekiz
E tremene sur bemdez c'huezeg heur enn iliz.

N'en devoa ket neuse c'hoaz kure bet d'he zikour,
Koueas a reaz klan bras didan pouez al labour.

Ar c'hlenved-ze a daolas ar belerined gez,
Ker kouls evel holl Arsis, en eunn dristidigez.
Deiz ha noz pedent Doue eus a greiz ho c'halon
Da rai dre he drugarez ar iec'hed d'ho ferson.

Doue, evel eunn tad mad, a glevas pedenou
Kinniget deshan bemdez gant kement a zaëlou ;
Rai a reue d'ho ferson eur guir baredigez,
Hag ho daëlou a droas el laouenedigez.

Ann den euruz Vianney a rea burzudou bras
Enn eur oellad ann dud klan ze da barrez Ars.
Ar gomz a rente ivez aliès d'ar vuded
Ha guellad dann izili a vije pelused.

Mar gree vad da bep unan, he gaëra burzudou
A reiye peurlieasa vit ar vugaligou ;
Rag evit ho en devoa eur garante dispar.
Jesus ive ho c'hare pa oa var ann douar.

Da gement burzud a rea hen lavare a ben
Oa groet dre ar meritou euz zantes Philomen.
Kredi rer en em glevent ho daou peurlieasa
Evit ober var eunn drô ar burzudou brasa.

Ann den euruz Vianney ne reo ket burzudou
Evit parea hepken da glenved ar c'horvou.
Ar c'hras en devoa ouc'h pen evit konvertisa
Ar bec'herien a zeue da Ars d'he vizita.

Digant Doue en devoa grasou a sklerijen
Da len beteg ar goueled kalon ar bec'herien.
Ouz a bep bro e teuent gant han da govessad,
Ho digemer a rea holl evel eur pastor mad.

Bemdez a greiz he galon hen a bede Doue
Da rai d'ar bec'herien baour ar c'hras da chanj bue,
Hag he bedennou nerzuz douget gant ann elet
A ie e peb lec'h da glask ar pec'her aheurtet.

Meur a hini anezho en devez amzavet
Kent en em gonvertisa ho devoa bet klevet
Eur vouez o laret d'ann noz e kichen ho guele :
« Sao'ta hag ke da goves d'ann aotrou Vianney. »

Oh ! gant pebes madelez ha douster a speret
E-tigemer atao ar pec'her glac'haret ;
Euz he zaoulagat rede diou vamen a zaëlou
Evit diskî d'ar pec'her gouëla he bec'hejou.

E peb lec'h oa enoret, meulet gant peb unan,
Hag hèn en em zizprize e peb tra hé-unan.
Lies en eur hirvoudi he lare gant glac'har
E oa ar reüsídika pec'her euz ann douar.

Penaus eta gousanvi ann enor, ar respet,
Ar meulodi roet dezhan a bep korn euz ar bed ?
Lakat a reas n'he sonj dilezel he barrez,
Ha mont d'ober pinijen beteg fin he vuez.

Var dro ann heur a greiz noz, a pa zonje dezhan
N'e oa mui den var vale oc'hevessat outhan,
Hen gemer he chapelat, ha leor he vrevial
En n'eur zisken goustadik euz kamb he brespital.

Guelet a oa koulskoude, hag eunn den euz a gher
A bignas kentis d'ann tour evit zor ar c'hleier.
Hag holl Arsis dihûnet enn eul lam a zavas
Da viñret ous ho ferson da guitat parrez Ars.

Douget gantho d'ann iliz beteg troad ann aoter,
Hen skuillas kals a zaëlou e presans hor Zalver.
Goude beza he bedet da rai dezhan zikour,
Joaus, evel diagent, tistroas d'he labour.

Houmes oa ann deirvet guech dezhan de vout guelet :
Oa zur bolonte Doue ma vije bet choumet
N'he barrez da labourat beteg fin he vue
Evit mad ann eneou ha brassan gloar Doue.

Daou vlavez ha daou ugent en devoa tremenet
E Ars oc'hober bonheur he barrezianet ;